

# Un ti emren war

Roet lamm da EDF o deus graet Patrick ha Brigitte Barbonnet en ur staliañ milinoù-avel ha pannelloù-heol e-kichen o zi. Abaoe pevar bloaz int emren penn-da-benn evit a sell ouzh an tredan, met ivez an dommerez hag an dour glan. Tec'het kuit eus Pariz er bloavezhioù 70 ez int deuet a-benn da ziskouez e oa tu da vevañ mod-all en ur zoujañ ouzh endro ha personelezh Breizh. O fal zo bremañ brudañ o zeknikoù hag o mennozhioù.



Koumanant ebet da EDF evit Patrick ha Brigitte Barbonnet. Abaoe 1997 eo emren o zi evit a sell ouzh an tredan a-drugarez da heol ha da avel Breizh.

**e**ürus int. Ha pa vefe glav o kouezhañ war o zoenn, heol o parañ war o douaroù pe avel o c'hwezhañ war o fenn ez eo eürus Patrick ha Brigitte Barbonnet. Emren eo o zi e Maezon-ar-Stêr, nepell eus Kastell-Briant. Abaoe 1997 n'eus ket ken a fun etre o zi ha peul EDF rak trawalc'h a dredan o deus gant o 6m2 pannelloù-heol hag o milin-avel. Ur gwir trec'h e oa bet evito peogwir e oant deuet a-benn da ziskouez e oa tu da vezañ emren e-keñver EDF hag e-keñver ur bern traoù all, gant ma vo youl en dud. Hag arabat krediñ e vev Patrick ha Brigitte Barbonnet evel tud "gouez". Meur a skingomz o deus, daou urzhiataer, ur skinwel ha binvioù tredan hag a c'heller kavout e tiez all Breizh,

daoust da ziaesterioù a-wechoù gant o rouedad tredan. Goude korventenn 1999, da skouer, e oa bet c'hwec'h mizvezh labourioù evit kempenn ar vilin-avel a oa kouezhet hag adstaliañ pep tra. Ranket o doa ober gant ar gaz bep an amzer, neuze. Emaint c'hoazh oc'h arnodiñ hag evit poent e lamm an nerzh kuit eus an urzhiataer pa lakaer an tredan da redek : "N'eo ket aes met tamm-ha-tamm e teuimp a-benn da gempenn pep tra" eme Patrick Barbonnet.

## PRIVEZIOU HEP DOUR

Taolioù-esae e-leizh o deus graet abaoe ugent vloaz. E-touez ar re gentañ e oa bet an tommer-dour-heol. "En ur erruout en ti em boa merzet e oa tomm an dour a deue eus an duellen a dremene er jardin peog-

wir e oa tommet en un doare naturel gant an heol. Goude meur a amodenn evit sevel pannelloù gwer, tuellennoù houarn, kouevr hag all ez on deuet a-benn da staliañ un tommer-dour-heol efedus-tre. C'hwec'h miz ar bloaz hor bez dour-tomm hep ober gant an tredan. Fiskal eo" a lavar Patrick Barbonnet. An dour a evont hag an hini a implijont evit fardañ boued pe evit en em walc'hiñ zo glav, bet puret ganto. Dastumet e vez e-barzh podoù-pri, enno ur sil ispiial. Goude-se e tremen dre tri dastumer. Gant raokel, lotuz ha gant maen tanveneziek e walc'hont an dour louzet ivez. En o frivezioù, avat, ne gaver sachdour ebet. Brenn-heskenn a lakaont er gibellig a-benn sunañ an troazh, ha neuze ar c'hwez fall, ha goude e adimplijont o fankoù mesket gant prouduioù naturel

# ar pemdez

evit fardañ rotel. “C’hwech’h den zo o vevañ en ti. Abaoe dek vloaz e reomp evel-se ha n’eus ket a c’hwezh fall nag a gelien er privezioù. Ur skiantour belgiat eo en deus ijinet an doare d’ober-se. Evidomp eo un doare da reiñ en dro d’an douar ul lodenn eus ar pezh en deus roet deomp el liorz’h”.

## CHEÑCH DOARE BEVAÑ

Hervez ar vro e fell d’ar re Varonnet ober. Abalamour da-se o deus savet un ti gant danvezioù naturel kavet ha fardet e Breizh : koad, koad faou, maen-glas hag all. “Évit Breizh eo ez eomp aet kuit eus Pariz er bloavezhioù 70. Ar vro he deus roet he finvidigezhioù naturel ha sevenadurel deomp ha fellout a ra deomp trugarekaat anezhi en ur zoujañ ouzh hec’h endro hag he fersonelezh” eme Batrick Baronnet, bet kelenner war ar sport a-raok reiñ e zilez abalamour da framm re strizh ar Stad hag he servij deskadurezh. Filozofiezh ar Reter ha hini Indianed Amerika a blij kalz dezho. Diwar o sevenadur hag o istor o deus desket kalz hag aze ivez o deus bet c’hoant da eskemm rak “maget e vez Mab-den gant an darempredoù denel”. Kenlabouret o deus gant Robert Chiron, kelenner e Skol-veur Naoned, en deus savet ar gevredigezh “Bolivia Inti” (Heol Bolivia). Unan eus he falioù zo diorren implij ar fornioù-heol e broioù Amerika Latina. “An hevelep kudennoù yec’hed a c’hell kaout ur vaouez o fardañ boued tro-dro d’an tan hag unan a vutun daou bakad sigarettennoù an deiz. War-dro pemzek eurvezh ar sizhun e tremen ar vugale o tastum kiloioù a geneud hag e-keit se n’o devez ket tro da vont d’ar skol. Ha pa soñjer e vez pep munutenn 200 den ouzhpenn war an douar ha zo kantar a goadeier distrujet e kaver a-bouez doujañ outo” eme Vrigitte Baronnet. Met n’eo ket ken aes-se lakaat e pleustr teknikoù evelte en Trede Bed pe e kêrioù ar vro, zoken. Start e vefe aozañ un droiad dastum fankoù a-benn fardañ rotel, da skouer. Ar vilin-avel zo staliet e Maezon-ar-Stêr zo ur c’hentpatrom bet savet gant un ijinaour ha koust a ra 60.000 lur. “Keit

ha ma yelo war greskiñ ar vevezerezh hag an dispign nerzh ne c’hello ket ledanat kalz an adimplijañ ha gwareziñ an endro en armerzh. Kaoc’h eo hor binvioù ma chom ar gevredigezh war an hent m’emañ. Lakaat an dud da louzañ an dour evit gwerzhañ dour naetet war-lerc’h zo diskiant penn-da-benn. Ken chalus eo gwelet emañ ar metoù “bio” o vont war hent ar c’hevalouriezh, ar c’hreizennañ. Sevel rouedadoù a strolladoù bihan tost d’an dud a rankimp ober. Ober lec’hel ha soñjal bedel zo ret” eme Batrick Baronnet. Kendrec’het en deus un nebeud tud c’hoazh. Ha bremañ m’eo diazezet mat o zi e klasko Patrick ha Brigitte brudañ o istor, o zeknikoù hag o mennozhioù.

Solenn Georgeault

“De la maison autonome à l’économie solidaire”, gant Patrick Baronnet

Ar re Varonnet a brodu muioc’h a dredan eget ar pezh o deus ezhomm. E-kerzh gouel miz Eost e tisplegont penaos e reont evit dastum ar restajoù.



## Gouel miz Eost

**D’ar Sadorn 11 ha d’ar Sul 12 a viz Eost** e vo aozet e ti-kezeg Gatines (44) ur gouel, “La planète décolle” e anv, ma vo c’hoariva, furlukined, abadennoù kezeg, ur sonadeg gant Môrce Benin hag ur fest-noz, un diviz diwar-

benn an darempredoù etre an ekologiezh hag an armerzh gant Jean-Claude Pierre hag all.

**D’an 13 d’ar 14 a viz Eost** e vo dalc’het ur Skol-veur hañv a roio ar gaoz da Batrick ha Brigitte Baronnet, Joseph Orszagh (kelenner Skol-veur), Robert Chiron, Bernard Menguy (ti savour), Lilian Legoff (mezeg), François Dufour (labouder-douar, eus ar c’hConfédération Paysanne) hag all.

Heol, hent Louisfert,  
44520 Maezon-ar-Stêr  
Pgz : 02.40.07.63.68  
ecofestival.free.fr  
heol@waikag.com